



# Bez Tivieg

## Hentad dizoleiñ Sal 2

### Rann « Mezolitik »



*Te eo an arkeologour...  
Sell mat ouzh ar skeledenn-mañ ha lavar deomp  
petra a c'hallomp gouzout gantañ diwar-benn ar  
chaseourien-dastumerien a oa o vevañ e Tivieg  
8000 bloaz zo...*

Anv .....

Anv-bihan .....

Deiziad .....

## Ar furchadegoù e Tivieg

1 Pe anv e oa an arkeologourien a oa bet o furchal ar bez-mañ ?

.....  
.....

Pegoulz e oa bet ar furchadegoù ?

- E deroù an XIX<sup>vet</sup> kantved
- E fin an XIX<sup>vet</sup> kantved
- E deroù an XX<sup>vet</sup> kantved
- E fin an XX<sup>vet</sup> kantved



2 Gant sikour ar gartenn a zo skritellet, kelc'h amañ dindan al lec'h m'emañ Tivieg.



3 E-barzh petra e oa bet toullet ar bez ?



.....

4 Petra a gaver er bez ?



5 An doare m'eo lakaet ar skeledenn zo disheñvel diouzh ar mod ma vez douaret ar re varv en Europa hiziv an deiz.

Setu div dresadenn : gant unan anezho e tiskouezer ar c'horf e bez Tivieg, 8000 bloaz zo (Ragistor) ha gant eben ur c'horf douaret hiziv an deiz. Merk dindan pep tresadenn evit peseurt mare eo.



.....

6 Evit pep tresadenn, displeg ber-ha-berr penaos eo lakaet an den marv.

.....  
.....

7 Perak eo bet lakaet ar c'horf evel-se da'z soñj ?

.....  
.....

8 Sell mat ouzh ar c'hregin : toullet int bet ha strollet int en ul lodenn hepken eus ar c'horf... Perlezennoù int. Petra a c'hallomp gouzout ganto diwar-benn stumm an den marv pa oa bet douaret ?

.....  
.....

9 Perak ne gaver na pod pri na bouc'hal levnet er bez ?

.....



# Bez Tivieg

Hentad dizoleiñ Sal 2  
Rann « Mezolitik »

Fichenn ar respontoù  
Evit ar skolaer pe an ambrouger



## Ur bez hep e bar

300 000 bloaz zo, d'an nebeutañ, e vez douaret e re varv gant mab-den (beziou Tud Heidelberg - Homo Erectus Europa - e mougev Atapuerca e Bro-Spagn), daoust da se n'eus bet miret nemet nebeut-tre a veziou kozh eus ar Ragistor. Koulskoude ez eus bet adkavet 35 e bae Kiberen. Perak ? 8000 bloaz zo (da lavaret eo, a-raok an Neolitik hag ar mare ma oa bet savet beziou ramzel evel ar c'hrugelloù hag an taolioù-maen) e kustume chaseourien-dastumerien eus ar Mezolitik douarañ o re varv e berniadoù kregin stummet ganto (o restaoloù). E Breizh e vez dispennet buan ar pezh a zo er beziou gant an trenk m'eo an douar ; aze avat emeur en un endro razek gant ar c'hregin. Se zo kaoz eo bet miret ar skeledennoù en ur stad eus ar gwellañ ha kalz traoù a c'haller gouzout ganto diwar-benn ar pobloù-se, o mod da vevañ hag o c'hredennoù.

Dizoloet e oa bet lec'hienn Tivieg e 1928 gant

Marthe ha Saint-Just Péquart, ur c'houblad a orin eus Nancy. Goude bezañ furchet e-pad tri bloaz o doa dizoloet 10 bez enno relegoù 23 den. Emaomp o vont da sellet a-dostoc'h ouzh ar bez H. Furchet e oa bet e 1929 ha 3 skeledenn a oa enni : 2 blac'h hag a oa etre 20 ha 25 bloaz, hag ur bugel etre 3 ha 5 bloaz. Skeledenn unan eus an div blac'h yaouank a weler amañ, diskouezet amañ en un doare pedagogel. Kement tra a weler aze a glot gant un dra hag a anavezer gant an arkeologiezh.

Adkavet eo bet an holl zent da badout en o flas er chagell pe er garvan. N'int ket bruket met uzet a-walc'h int. Pa studier an izotop peg ouzh kollagen an dent e weler ivez e kustume ar plac'h-se debriñ kalz proteinoù diwar ar mor ha gallout a reer lavaret e tebre traoù yac'h, dreist-holl produioù diwar ar mor hag a oa traezh enno. Yac'h-tre e oa hec'h eskern hag an torroù a weler zo deuet war-lerc'h ma oa bet douaret.

## Fin ar chaseourien : eskemmoù pe kevezerezh ?

Ha pa oa ar plac'h-se o vevañ e Tivieg d'ar mare ma oa ar c'hentañ gouniderien-saverien o tont war wel, e oa-hi e-barzh unan eus ar strolladoù chaseourien-dastumerien diwezhañ en Europa. Bep ma veze ar c'houniderien oc'h en em staliañ tamm-ha-tamm war dachennoù nevez e kejent gant strolladoù bihan a gantreerien, chaseourien-dastumerien anezho. Petra e oa an darempredoù etre ar pobloù-se disheñvel-mat o doareoù da vevañ ?

**Eskemmoù.** Chomet ez eus roudoù eus an darempredoù-se, evel traoù eskemmet etre ar c'humuniezhoù pe cheñchamantoù sevenadurel. Desket e oa bet gant lod eus ar chaseourien penaos fardañ podoù, lod all a groge da sevel loened doñv. E-keit-se e rae ar c'houniderien gant begoù saezhoù hag a oa heñvel a-walc'h a-wechoù ouzh re ar chaseourien ! Met moarvat ne veze ket c'hwek an darempredoù dalc'hmat.

**Kevezerezh.** En em staliañ a rae al labourerien-douar en traoñiennoù o douaroù strujusaet gant kresk-dour ar stêrioù. Met pouezus eo an tachennoù-se evit ar chaseourien hag ar besketaerien ivez. Pa greske niver al labourerien-douar e oa tonket ar jeu da sevel etre an dud. Adkavet ez eus bet roudoù foziou ha treilhoù en-dro d'ar c'hêriadennoù, ar pezh a ziskouez o deze aon a vezañ taget. N'ouzer ket avat hag-eñ e vezent taget gant tud eus kêriadennoù all pe gant chaseourien gantreat.

**Mont da get.** Daoust da se e talc'has an daou sevenadur kichen-ha-kichen e-pad meur a gantved e broioù zo. Moarvat ne oa ket bet sachet diouzhtu ar gantreerien war-zu mod bevañ ar c'houniderien ma ranker labourat kalz muioc'h eget ar chase hag an dastum. Trawalc'h o deze da vevañ, a-galz, se zo kaoz e oa bet pell al labour-douar oc'h aloubiñ Europa a-bezh : meur a vil bloaz. Marteze e oa deuet strolladoù chaseourien zo da vezañ gouniderien.

Evit strolladoù all, marteze e oant aet da get, na mui na ken.

**Heñvelaat.** Alies ez eus bet komzet eus an Neolitik oc'h en em ledañ en Europa ar C'hornôg evel aloubadeg un dachenn, ken buan all avat ne oa nemet teknikoù oc'h en em ledañ. Gwelet a reer e kreske kalz ar boblañs da-heul lañs al labour-douar. Soñjal a reer e oa 2 vilion a labourerien-douar o

vevañ etre Frañs hag ar Mor Du tra ma ne oa nemet meur a zek mil chaseour-dastumer. Koulskoude e ouzer, gant studiadennoù genetek, ez eo pobloù Europa ar C'hornôg diskennidi d'ar strolladoù chaseourien bihan-se dreist-holl ! Kalz zo da zeskiñ c'hoazh diwar-benn ar mare-se eus hon Ragistor.

## Respontoù an hentad dizoleiñ Sal 2 - Bez Tivieg

- 1 Marthe ha Saint-Just Péquart, sikouret gant an ao. M. Boulle dreist-holl / Deroù an XX<sup>vet</sup> kantved.
- 2 Tivieg zo un enezenn vihan er c'hornôg da C'hourenez Kiberen.
- 3 E-barzh ur berniad kregin (re istr dreist-holl) ha traezh.
- 4 1 : Mein bras / 2 : Klopenn ha skeledenn / 3 : Kregin toullet. / 4 : Ostilhoù sileks
- 5 Hiziv an deiz / Ragistor.
- 6 Ragistor : tamolodet eo ar c'horf ha pleget an divhar. A-wechoù e veze gronnet en ul liñsel. Interet e veze en douar war-eeun.  
Hiziv an deiz : astennet eo ar c'horf war e gein. Lakaet e vez ar c'horf en un arched.
- 7 Diz zisplegadenn a c'heller reiñ : pe ne oa ket plas a-walc'h evit astenn ar c'horf er bez, pe e oa an doare-se da damolodiñ ar c'horf diouzh ar gizioù kañv ha diouzh kredennoù ar mare-se.
- 8 Strollet eo ar perlez en-dro d'ar glopenn (ar gouzoug). Gallout a reer soñjal neuze e oa ur c'holier kregin gant an den marv pe kregin war e benn, peotramant e oa bet gwriet kregin war gouzougenn e zilhad. An darn vrasañ eus ar c'hregin-se zo bigorned melen pe roz hag a weler stank war an aodoù er vro-mañ.  
Gwisket e oa an hini marv gant dilhad pompadus.
- 9 Ne oa ket bouc'hili levnet na podoù d'ar c'houlz-se c'hoazh. Er Mezolitik e oa (etre 10 000 5 500 a-raok Jezuz Krist), a-raok an Neolitik eta hag ar mare ma voe diazezet kevredigezhioù labourerien-douar divoneerien. Da neuze e oa mareoù diwezhañ ar chaseourien-dastumerien hag a zastume an traoù naturel a gavent en-dro dezhe.